

GWERS ZANT JILI, ABAD

*Pardon bras ar zant-man ken brudet a ve gret e
Zan-Jili Gouarek hag e Zan-Jili Plijo ar c'hen-tan
zul a vis Gwengolo. E Gouarek a zo eur pardon
all deiz zul ann Dreindet.*

DISKAN. O zant Jili, er bed-man
E poe bec'h eveldomp :
Pa n-oc'h enn envou breman
Zikouret ac'hanomp !

1. Eunn Ilis koz a weler didan gwe ar veret
Enn enor da zant Jili gant hon tadou zavet.
2. Chilaouet buez ar zant, hag, evel hon tadou,
D'hen bizitan 'n he Ilis c'houi dei a vagadou.
3. Enn Athen e oe ganet war-dro ar bla pemp kant,
He gerent a oe pinvik enn aour hag enn arc'hant.
4. Daleg neuze he speret, leun a wir sklerijen,
Ne re na van na zeblant eus ann traou a dremen.
5. Dal ma varvaz he gerent e kuitaz he noblans,
Hag e teuaz dreist ar mor e rouantelez Frans.
6. 'N eur c'hood tost d'ar ger a Nim e re he binijen,
Den ebet en dro dezan, nemet Doue hepken.
7. Den ebet endro-dezan, nemet ann elet mad,
Ha lonet goue o redek e pevar c'horn ar c'hood.
8. Toen ebet us d'he benn nemet eur roc'h ledan,
Mann ebet evit gwele nemet iot zec'h ha man.
9. Amzer d'amzer eunn heiez beteg he beniti
A zilampe da gavet he mignon zant Jili.

10. Rei a re-dezan he lez da dorri he zec'het,
Hag ouz he dreid da ziskuiz e chome gourveet.
11. Lies e buez ar zent e welomp evel-se
Lonet goue o serviji zervijourien Doue.
12. Eur wech gan he dudjentil, Childeber, mestr ar vro,
A erruaz er c'hoajou da redek ar c'haro.
13. Ar clas war an heiez kez a gouezaz hep true,
Ha trezeg ar peniti ann heiez a dec'he :
14. Eur bir tennet warnezi o sonjal he lazan,
A ninj beteg dorn ar zant hag a flemm anezan,
15. « *Den Doue pardonet dimp, eme ar chaserien,
Nizo kristen, evel doc'h, ne n-omp ket bourevien.* »
16. « *Bezet dinoc'h, 'me Jili, koulshoude, me ho ped.
Disprizet, euz a creman plijadurez ar bed.* »
17. *Karet a greiz hon kalon Jezuz-Krist hon Zalver
Hen eo hon Roue kentan, hen a vo hon Barner.* »
18. « *Trugare, 'me Childeber, ho komjou o blij d'in;
Eus ma c'hoste digenac'h eunn dra a c'houlenin:* »
19. *Enn dachen-man e fell d'in zevel eunn abati
Ha kaout evid abad ar manac'h fur Jili.* »
20. Ann abati oe zavet ha karget hep dale
E kichen ho zad Jili a g ls a vugale.
21. Elec'h bleidi o iudal n'eus ken er c'hoajou don
Med mouejou flouro kanan ha trousarc'h loc'h o son.
22. Elec'h brezel ha pec'het n'euz ken tro-war-dro
Nemet peoc'h ha karante etouez oll dud ar vro... .
23. Enn draouien-man a zaelou zioulder na bad ketpell,
'N eun tol e strak ar gurun hag e vlenj ann avel !
24. Eur vanden tud divade, o tremen, a lakaz
Ann distruj hag ann tan-goall war al leandi vras.
25. Boe ann deiz-se zant Jili zo truezuz meurbet
Kenver neba wel he draou gant ann tan gourdrouzet
26. Ann abati enñ he zav oe laket eur wech c'hoaz
Ken koant e kreiz ar c'hoajou ha ken leuna biskoaz.

27. Burzudou eus ar c'haeran d'ann oll à ziskoe
Pegment e oe nerzuz ar zant dirak Doue.
28. Eunn den broudet gand eun aer, koenvet he izili,
Enem gavaz iac'h kenkent ha ma e halvaz Jili.
29. Eun den all nem draille gand an diaoulou hinjet
Hag enn ilijou zoken e koueze 'n he glenvet :
30. Dal ma tostaz zant Jili ann diaoulou spontaz
Hag ar c'hlavour diboaniet raktal a bareaz.
31. Eur wech lestr war ar mor, kreiz ar c'hommou diroll,
Hanter-venet ha flastet, a oe o vont da goll :
32. Hogen ar zant gant fe grenv daoulinet a bede,
Hag ous he glevet ar mor war-ann-tol a dave,
33. Terhien domm ha follante a zente ous he vouez,
Hep louzaouen-all ebet nemet he zantelez.
34. Ar burzudou re gwejall, Jili ho gra bepret ;
Hiriv e galon zo c'hoaz hen tomm enn hon andret.
35. Dreist-oll nem bli ar zant etouez ar vugale
Vel ma re Jezuz he Vestr er bed-man pa veve.
36. Karante dener ar vamm, daoust d'ar boan a gemer,
D'ho diwall a bep reuz fall ziouaz a zo dister !
37. Hastet eta, kerent fur, kflask zouten uc'heloc'h,
Ar Werc'hez ha zant Jili a chilaouo ouzoc'h.
38. An Abad koz a lare pa oe lost da verval :
« *Deut e goude keit amzer ma C'hrouer d'am gervel.* »
39. *Skuiz onn o tougen ar zamm, ha poend e d'in ninjal,*
Skanvoc'h evit ar goulmik, etrezeg ar bed-all.
40. *Enem garet, bugale, miret ar gwir-lezen,,*
Hotad euz ar Barados n'hoc'h ankouao biken.»
41. Aboe maro zant Jili kristenien leiz ann hent
A ia da welet he ve, breman vel diagent.
42. Ar Vretonet a belzo a westlaz 'n he enor
Kals a chapeliou devot a bep tu dre Arvor.
43. Galvomp ive zant Jili : allaz ! ezomm a m-omp
E teufe mui 'vit biskoaz he vadelez warnomp !

PEDEN.

44. O zant Jili biniget, plijet genac'h diwall
Hon eneou a bec'het, hon tier a dan goall.
45. Miret d'al labourerien ho ed hag ho lonet
Vel ma virec'h ann heiez e poe gwejall donet.
46. Pelleit ous hon re-vian ger kement tra ho c'harsfe
Da grenvat enn ho memprou hag e doujans Doue.
47. Gret eur zell war ann anaon zo ho c'horf interet
O c'hortoz trompil ar varn eudro dac'h er veret.
48. Evit ma c'hellimp erfin, re iaouank ha re goz,
Meuli Doue da viken genac'h er Baradoz !

EVEL SE BEZET GRET !

C. GUITTEREL, *person Gouarek*, 1899.

Imprimatur :

Brioci, die 16^e Augusti 1899.

M. LE PROVOST, *Vic, gen.*

N. B. — Setu aman ar geriou euz ar c'chantik pere n'int ket
marteze anavet gant ann oll.

Heiez, biche, femelle du cerf

Peniti, ermitage.

Redek ar charo, chasser le cerf

Eur bir, une flèche.

Manac'h, un moine, un religieux.

Zioulder, calme, tranquillité.

Dicade, sans baptême, infidèles.

Leandi, monastère, couvent.

Izili, les membres du corps.

Ar c'hommou diroll, les flots déchaînés.